

Novembre 2018

Ar rest a zo laket 'vit peti gant ma map
=
« Kenavo Keriku, Toussaint a Gervgevek
Eun den a oa ker mad, ni a zo revinet.

276

Adalek an oter tre beteg an nor ~~d~~zal,
E laket e kanvou an iliz vraz Pleuzall
=
Enn iliz vraz Plezall kanvou a zo laket
gwella den oa er bet
Gant keun da Geriku Toussaint a Gervezek
=

(Fin 18° ou 19°se) Composé du vivant de la mère de Mari ar Garerez celle-ci a 16 ans le chantait en filant, *un jour* que le frère de Toussaint de Kerguezec étant à la chasse ,passait devant sa porte, & elle le vit pleurer)

=
du ~~man~~chateau de
Toussaint de Kerguezec, seigneur de Kerinacuff)

Mari ar charlez cf p.68

—
Etré Karaez ha Montourlez
Man ar plac'h koant Mari ar Charlez
=
Hag eun tokik kastor war hi fenn
Hag eur c'hleve hir hi barlen
=
Gant hi daou gi red enn hi c'hichen
Eunan a zo du an all zo gwen

277

Hag en eur vonet didan ar c'hoat
Ne ra met kanan ha c'huitellat
=
Dibonjour d'hac'h, Mari ar Charlez
Ha c'hui ma c'homer enn Montourlez ?
=
~~mont da~~ ien
Ha ~~p~~Penoz da gomer gan-ec'h,
Ha tout an archerien war ma lerc'h ?
=
- M'ho tifenno ouz ann archerien,
Me ho lakaio war ma barlen. »
=

Novembre 2018

Markiz ar Rivier a lavare
 Enn Karaez ha pan arrue
 =
 - Iec'hed d'ac'h ha joa barz ar ger man
 Pelec'h e 'nn hostaliri 'r vrasan ?
 =
 Pelec'h e 'nn hostaliri 'r vrasan ?
 Ha ma ienn-me enn hi da leinnan,
 =
 Ha ma ien-me da leinan enn hi,
 Mari ar Charlez aman gan-i.
 =
 Gan-in ar plac'h Mari ar Charlez
 O vont da gomer da Vontourlez.

278

Markiz ar Rivier a lavare
 Barz enn Montourlez pan arrue
 =
 Iec'hed d'ac'h ha joa barz ar ger man
 Na pelec'h eo ar prizon aman ?
 =
 Ma c'homer goant Mari ar Charlez
~~A-deu~~ Zo ont d'ar prizon da Vontourlez.
 =
 Mari ar Charlez p'e deuz klevet
 Da Varkiz ar Rivier deuz laret :
 =
 Markiz trubard, mam bije gouiet
 Birviken tam n'am bije debret,
 =
 Na vije laket da wad ker ien
 Ha ma d-eo an houarn pe ar vein
 =
 Me am euz diou c'hoar barz ~~ar ger~~ ar vro man
 Na blego ket ho fenn da welan
 Na blego ket ho fenn da welan
 Vit gwelet krougan ho c'hoar henan
 =
 A dra zur ma karje ma lezvam
 Bout roet d'in bevanz deuz va ezom
 =
 Na vije ket bet naonek
 D/Tri de e korn eur park balanek

279

Me na vijen ket eno chomet

~~E tri de~~ Hep dibri nag evan man ebet

=

Etre Karhaez ha Montourlez

Ez euz euz eur bod koat karget a zrez

=

Liesoc'h a ben marv zo enn han

Vit n'en deuz er garnel er vro man,

=

Liesoc'h a ben marv zo enn han

Ha me meuz sikouret ho lazan.

=

Mari ar Chalez a lavare

War var an huella pa bigne

=

Ne refenn ket man demez mervel

Man bije enn ~~dam~~ zad deuz ma c'hervel

=

Me garfe kavet kalon ma zad

Etre an douar ha plant ma zroad

—————

(+218) 280

Groek ar charpentour

=

Pan n'eo ma mamm, pan n'eo ma sad

~~Mem bije~~ Me am be bet met eun oac'h mad

~~Me~~ Mem mije ~~ket~~

=

am ~~ket~~

Mem bije bet mab eur mintour

N'em be ket bet eur charpantour.

=

« Tevet ma mères'h na welet ket

D'ar charpentour ne vank ket boet

« D'ar charpantour ne vank netra

Met he grampoz hag he vara »

—

emeuz

Gwasik-an tra ~~e-ve~~ gant han

Ve ab hi ~~b~~voet (+) da gas d'ehan.

=====

Penoz ienn-me de gas meren

Wi on na hent na binojen.